

# KIMMIAD

Habitantet Plouyan d'ho Ferson, an otrou SILLIAU,  
 ha d'ho C'hure, an otrou LAURANÇ.

Var ton : *Santes Mari, mam Doue.*

Christenien a Vreiz-Izel selaouit eur c'himmiad  
 Zo gred d'an otrou Silliau, ar Pastor douç ha mad  
 Couls ha d'an otrou Lauranç, e gure respectabl  
 Gant Plouyannis glac'haret d'an daou vèleg aimabl

An habitantet a voa ebars en ofern bred  
 Nombas, evel ar c'hustum, a jommas estonet  
 Pa yas an otrou Person, goude an aviel,  
 Er gador da lavaret dêze a voues huel :

« Plouyannis ker, va breudeur, oc'h avertis' a ran  
 » Penos an otrou Lauranç, cure ar barres man  
 » A zo hirio partiet, evit mont da berson  
 » Dre urz an otrou n'Escop, da zant Yan Trolimon.

» Me va unan, va breudeur, a deu er memestra  
 » D'ho kuitat goude bea bet epad nontek-va  
 » O c'houarn oc'h encou, en hano va Zalver ;  
 » Fot a yec'het e rancan lezel va c'harg pouner.

» Gred e meus va oll bossubl evit ellout derc'hel  
 » Va denvedigou didach d'ar pastor Eternel,  
 » Dre va zourci peurbadus e meus laket evez  
 » Ne deujent da zilêzel hent ar zilvidiguez.

» O va farrossionis ! Ma zeus unan aman  
 » Hac a elfe lavaret e me gred droug dean,  
 » Dirac Jesus, va barner, eus a greis va c'halon,  
 » E c'houlennan digantan er gador man pardon.

» Betek va heur divea me a zalc'ho memor  
» Eus an denvet a here e zon bet ar pastor ;  
» Er plaç ma yan da dremen ar rest eus va deyout  
» Me zavo c'hoas va daouarn e trezec an envout.

» Pa deuyo unan benac ac'hanoc'h da vervel  
» Me zelebro evitan ar sacrific santel  
» Evit goulen ma yêlô e ene da repos  
» Gant ar zænt hac an ælez en gloar ar barados.

» Ha pa glêfoc'h lavaret penos ar Person cos  
» N'ello ken pedi doue da rêi dec'h e vennos ,  
» D'ho tro sonjit en ennan , me ho ped , Plouyannis ,  
» Goulennit graç d'e ene dre eun *De profundis*.

» Ne meus ken da lavaret d'ec'h aroc o kuitat  
» Nemert pedi ac'hanoc'h da chom var an hent mad ,  
» Ha pa deuyo ar barner da jugi on œuvrou  
» E n'eur gaffomp assambles en pales an envout. »

N'en devoa ket êchuet ar person e gomzout  
Pa gommanças en Ilis an dud da skuil daêlou ;  
Ha pa voa fin d'an ofiç e c'helliet guelet ez  
Var bizach pep assistant merk an dristidiguez.

An devez ma partias an otruou Silliau kuit  
E yas pennou ar barres da rêi dean bizit ,  
Hac an oll habitantet , mantret gant an anken  
O devez bet grêd dean o adieu evellen :

Ne mijemp biken erdet e teujac'h ker buan  
Da guitat , otruou Person , eus a barres Plouyan ,  
Hor c'halonou a zo stag ouzoc'h pell amzer zo  
Hac ec'h esperemp o caout betek heur o maro.

Hor bugale ganeç'h-u a zo bet badect ;  
Evit ober o faskou o c'heus int instruet ;  
Sonjal a ræmp e teujac'h eun deis d'ho eureuji ,  
C'ouls ha ma c'hoantemp bea interret ganec'h-c'hui.

Pebeus consolation e voa demp Plouyanpis  
Bea gant hon daou vêleg sul ha gouel en Ilis !  
Peguen caër e voa clêvet ar c'han en ofiçou ,  
Couls en oferennou bred evel er gousperou.

Sonj oc'h eus , otrou Person , e teuac'h er blacen  
D'har zuliou , evit guelet c'hoariou o panden ;  
Hac evel ma tistroac'h da gana gousperou  
E vije laket ractal termen d'an oll jeyou.

Pa vije fin d'an ofiç e teuac'h adarre  
Da velet c'hoari boulou , gant an otrou cure ,  
Ha pell aroc ma vije êd an heol da guzat  
E yemp kuit en eur reket d'êc'h o taou nosvez vad.

C'hui hac an otrou Lauranç o poa cals a adress  
Er fêçon ker dilikat da vouga eur procès ;  
C'hui a garie lavaret e voa eur goal sottis  
Da zaou den fur rêi arc'hant da zêbi d'ar justis.

Dre o cuzuliou ker mad e vuiac'h dont a ben  
Da lakat plom ar brudanç en dud re skan a ben ,  
Ma zave var eun affer eun tam dizançon  
E vijac'h evit barner galvet , otrou Person.

Peneverde offançi o modesti ker bras  
E mijemp , otrou Person , o trugareket c'hoas  
Eus an oll vadelezou oc'h eus evidomp bet  
Kêit oc'h eus 'evel pastor , ar barres gouarnet.

C'hui oc'h eus , en o c'hlenvet , sicouret ar beorrien  
Betek e n'eun diviska eus o camizolen ,  
Evit golo corf sclasset eur c'hlanvour anter noas ;  
Nan c'hui n'oc'h eus ket allet refusi den biskoas .

Pell pell goude ma viet eus Plouyan partiet  
Ni a vouelo c'hoas dourec en kornik an oalet ;  
Ne zizousfomp birviken eus hor bêleyen gos ,  
Eur bater en agimus vo evite bemaes.

Peguen truezus kèlou da gass d'hor bugale  
Zo deuz ar gær partiet evit mont d'an arme!  
Pa zigassent demp lizer da rèi eus o c'hélou  
E rankemp prezenti dèc'h eus o feurs respejou.

Ha breman, pa zistrofont n'ellint ket mont ractal  
Ma vint er vro, d'ho kuelel, ebars er prispital;  
Ha ma vemp siouas! maro pa vezim erruet  
E c'hazefont da vouela var eur men er veret.

Deut alies d'hor guélet ni ho ped, otrone,  
Joa vras a momp diouzoc'h p'errufet er c'hontre  
Pa blijo ganec'h o taou dont c'hoas ebars er vro  
E yello an dud digna eus Plouyan d'ho receo.

Ni a reket ma plijo gant an otrou Doue  
Rèi dec'h yec'het ha bonheur, couls ha prosperite,  
Eus a greis hor c'halonou ni bed ar Brovidanç  
D'ho lezel pell er bed man evit o recompanç.



**Propriété. P. DERRIEN.**